



Imbabura

Niverenn 84
31 Kerzu 1976

IMBOURC'H, KELAOUENN BOLITIKEL

Seizhvet bloavezh

Niverenn 84

31 Kerzu 1976

Kleiz pe zehoù ?p.189
Kenskriverezh e sigur kevangevreadelouriezh
.....p.205
An emsav dres a-raok an eil brezel-bed :
ar gelaouenn WAR-DU AR PALp.215
Penaos emañ kont gant ar saverezh-yeer hag
*ar bouedijinerezh yeer-ha-chatal e Breizh...*p.225

Koumanant-bloaz : 40 lur.

K.R.P. Y. Ollivier, 1 534 25 Roazhon. Deraouiñ a
ra ar c'houmant-bloaz e miz Genver.

Priz an niverenn-mañ : 6 lur. Ar pennadoù a zo da
gas da : Y. Ollivier, 7 bd. A.-Burloud, 35 000
Roazhon.

CPPP : 50 015

KEMENN

Bez' ez eo an niverenn-mañ an hini diwezhañ eus koumanant 1976 ; evel boaz avat e kasimp teir niverenn ouzhpenn d'ar goumananterion a gavo aes-oc'h paeañ o c'houmanant diwezhatoc'h ; ar re, na fellfe mui dezho degemer ar gelaouenn, avat, bezent hegarat a-walc'h evit reiñ deomp da c'houzout.

Kounañ a reomp danvez an niverennoù da zont :

- miz Genver a vo gouestlet da '*Zeizlevr Youenn TROAL er Perou*' ;
- da vuhezskrid *LANGLEIZ* ha d'e oberenn e vo gouestlet niverenn miz C'hwevrer ; en niverenn-se ivez e vo moulet ur buhezskrid eus *James BOUILLE*, ti-savour ha brogarour eus an *eil EMSAV* ;
- e niverenn miz Meurzh e vo kavet notennoù ha pennadoù distag ;
- e niverenn miz Ebrel e vo moulet skrid an *DEVEZHIOU-STUDI* e Kistinid, e dibenn ar bloaz 1976, diwar-benn *marksouriezh*.

Kounañ a reomp d'ar goumananterion e vefemp an-aoudek-bras outo ma c'hellfent prenañ ivez ar stagadennoù : o vezañ maz eo dister-tre niver ar goumananterion hon eus ezhom eus ur seurt skoazell evit gellout kenderc'hel da embann *IMBOURC'H*.

Evel m'en deus merket meur a lenner e oa diaezet a-wechoù gant ar yezh implijet er gelaouenn e klas-kimp adembann ur geriadur eus ar yezh arnevez.

~~~~~

K L E I Z P E Z E H O U ?

Unan eus ar skoilhoù a vir ouzh an Emsav d'en em ledañ ha, dreist-holl, d'en em lies-seurtekaat evit klotañ gwelloc'h ouzh gwirvoud ar gevredigezh e Breizh, ez eo an doare sponterezh speredel a vez embreget gant stourmerion herrboell zo a glask keferata bepred ur gostezenn gleiz ouzh ur gostezenn dehoù e diabarzh an Emsav. Oc'h ober se en em zoug ar stourmerion-se un tammig evel gouennelourion a garfe enebañ ur rumm a zibabidi hag a salvidi, peurvad ha difazius, na petra, ouzh ur rumm all a dorfedourion hag a zaonidi, fall-akr ha brein, boued ar groug anezho, hag a ranko bezañ diskarzhed didruez diouzh an danvez kevredigezh vrezhon emaint o sevel ; e spered ar gleizourion disi-mañ e c'hoari an dehouidi, moarvat, roll ar Yuzevion e spered bourc'hizion broioù ar c'hornog en hanterenn gentañ an ugentvet kantved. Gouennelouriezh ha farizianezezh, enta, an hini eo a c'heller rebech ouzh difennerion ur vertuz nevez zo.

~~~~~

Ne lavaromp ket eveljust n'eus diforc'h ebet da ober etre dehoù ha kleiz war dachenn ar politikerezh. Pezha ziogelomp avat, gant

nerzh, eo ez eus estreget ur gostezenn dehoù pe gleiz er politikerezh e bed ar c'hornog ha n'eo an daelerezh a fell d'ar varksourion diazezañ etre kleiz ha dehoù netra nemet ur c'haderezh touellus da rediañ o enebourion, pe darn anezho da vihanañ - "divide ut imperes"! - da sujañ dezho.

Sellomp a dostoc'h enta ouzh ar gudenn.

Da gentañ, bez' ez eus, eveljust, ur gostezenn dehoù. Dre vras ez eo amparet ar gostezenn-mañ gant bourc'hizion henvoazel, dezho gladoù pe gargoù er gevredigezh abaoe un toul-lad rummadoù; ar re-se, na petra, a glask mirout ar gladoù pe ar c'hargoù-se ha dre se int enebet ouzh kement kemm hag a c'hellfe lakaat en arvar o madoù pe o brientoù. E Bro-C'hall ez eo troet ul lodenn eus ar vourc'hizion-se a-du gant an Iliz ha kement-se a zo da verkañ rak alies, e Bro-C'hall, ez eur bet boaz da ober eus ar relijion ur merk-diforc'h-añ etre dehoù ha kleiz; ur merk-diforc'h-añ all a zo bet ivez, e Bro-C'hall bepred, ar vrogarouriezh pe, kentoc'h, an impalaouriezh; en em ziskouezet eo an impalaouriezh-se a-wechoù en un enep-yuzevadegezh arloupet ha dall (kv. afer Dreyfus e Bro-C'hall e deroù ar c'hantved); en Alamagn hag e Rusia avat e oa lodet an enep-yuzevadegezh-se gant un darn eus ar werin tra ma oa dianav, er c'hontrol, e-touez bourc'hizion virour Italia, Spagn pe Saoz.

Bremañ e rin un evezhiadenn. Ne c'heller ket lavarout ez eus en Europa ur gostezenn dehoù unvan a vefe ledet penn-da-benn d'ar c'hevandir-mañ. E pep bro ez eus diwanet ur gostezenn dehoù hag ur gostezenn gleiz diforc'h.

Gwriziennoù istorek fetis a zo, da skouer, d'an enep-yuzevadegezh e pep bro. Dre se, maz eus kostezennoù dehoù ha kleiz e Breizh pe en Emsav e tlefent bezañ diforc'h diouzh ar c'hostezennoù Kleiz ha dehoù e Bro-C'hall ha bezañ frouezh un istor breizhat diseurt. Ha setu dres pezh na verz ket hor barnerion ouennelour en Emsav: evit divizout ez eo ar stourmer-mañ-stourmer pe ar strollad-mañ strollad eus an tu-dehoù en em harpont war verkoù ha n'o deus ster ha talvoudegezh nemet e framm istor Bro-C'hall. Evel maz eus bet eneberezh etre Iliz ha kleizouriezh e Bro-C'hall e vo graet un dehouad eus kement stourmer a zo e chal gant dazont ar Feiz er vro-mañ hag a nac'h en abeg da se heuliañ n'eus forzh peseurt politikerezh a vefe war var marteze da lakaat en argoll dazont an Iliz er vro-mañ.

§§§§§§

Hogen, petra a dalvez a-hend-all ar merk-où-barn hon eus meneget? Nebeut a dra, e gwirionez, rak n'eo ket groñs an diforc'h etre dehoù ha kleiz ha c'hoarvezout a ra alies gant ur gostezenn gwiskañ botoù eben. Gwelet hon eus ar gomunourion e Bro-C'hall o tont da vezañ broadelourion douet hag int o tifenn dis-hualded ha meurded Vro-C'hall a-gevret gant dalc'hidi strolladoù an tu-dehoù pellañ. Kement all a oa c'hoarvezet endeo gant komunourion Rusia, deuet da vezañ impalaourion e-giz an Tsared hag, a-wechoù, enep-yuzevat, evel komunourion Bologna a-hend-all. Diouzh un tu all, er c'hontrol, e c'hoarvez gant dehouidi, riezalourion pe impalaourion, kentoc'h, oc'h amprestañ digant ar sokialourion darn eus o

steñvadurioù armerzhel pe gevredigezhel, treñ da gleizourion e keñverioù zo, evel ar genelwerinelourion en Alamagn Hitler (rak-se e troas sokialourion zo e Bro-C'hall, evel Déat, a-du ganto e-pad ar brezel) - pe ar faskourion en Italia.

Lavarout a c'heller ivez emañ ar c'henn ebre dehoù ha kleiz nann-komunour o vont war danavaat bemdez en Europa ar C'hornog diwar vremañ. O pakañ krog en-dro er galloud e talc'h ar virourion e Bro-Saoz an adreizhoù bet degaset er gevredigezh gant paotred al Labour e-kerzh o frantad-gouarn ; kement-all a c'hoarvez e Sveden, lakaomp. Gouzout a reer ivez n'eo ket bras an hed etre Republikaned ha Demokratet er Stadoù-Unanet. War ar marc'h-ad ez emdro ar strolladoù kleizat nann-komunour ha dieub war-du ar c'hreiz dalc'hmat, dre ma tremen an amzer, ma n'int ket bet gouest da dapout krog er galloud. Kement-se a zo gwir dreist-holl, eveljust, diwar-benn strolladoù sokialour an eil etrevroadelenn hogen arabat eo disoñjal ez eo distremenet ar S.K.G. gant gronnadoù kleizelour abaoe 1968, dre gomz atav ! P.S.U. ha C.F.D.T., da vihanañ, a glask korntroiañ ar gomunourion war an tu kleiz.

Er broioù all e tro ar gleizourion, kemeret ar galloud ganto, da zifennerion un urzh diazezet nevez, o tiwall brientoù ur framm hag un ideologiezh nevez, e-giz e Mec'hiko, e Rusia ha bremañ e Sina, pe neuze ez anad en o c'hreiz tuadurioù diforc'h o kevezañ, evel maz eus marteze er Strollad komunour Sinaat end-eeun, e-lec'h e c'hoariont roll ar c'hostezennoù kleiz ha dehoù, diframm avat.

SSSSSSSSSS

Anzav a ranker ivez, ne vern penaos, n' en em gemmesk ket ar strolladoù kleizour gant ur yoc'h a davanteion hag a beorion evel ma

raent e deroù ar c'hantved ; merket hon eus dija ne oa mui 'gwerin' ebet diwar vremañ en hor broioù diorreet ; lavaromp kentoc'h, enta, ez eo harpet ar gleizourion hiziv gant rummoù bourc'hizion pe zanzev bourc'hizion nevez, mall warno bout perzhiek er galloud, diouzh un tu (ar re-mañ a bourchas frammoù ar strolladoù kleizat), hag ivez gant ar gwis-kadoù ar muiañ dibourvez eus ar boblañs, nemet kalz uheloc'h o rez-bevañ, ne vern penaos, eget hini o zadoù un nebeut dekvedoù zo ; paourentez keñveriel avat n'eo ket unan gant an dienez hag e gwirionez ne vez ket buhez et hevelep doare. Bezet pe vezet, enk a-walc'h eo ar gennadoù boblañs en em sant kevarzhet da vat gant ur gostezenn zo hag e-kreiz saviadoù tenn e c'hell ar peb brasañ eus ar boblañs sevel a-du gant ur gostezenn pe eben, o renaviañ en un taol he dibaboù kent (pezh a ziskouez, n'eo ket an emskiant renkad dihun a-grenn e spered an darn-vuiañ eus an dud) : sellit ouzh an Alamaned o vouezhiañ a-vern evit Hitler goude ma oa bet darbet dezho reiñ ar muianiver eus o mouezhioù, hogozik, d'ar strollad komunour pe neuze pevar-ugent eus ar C'hallaoued o vouezhiañ a-du gant De Gaulle da geñver poblattersoù zo.

E gwirionez e sant ar boblañs n'eo ket ar strolladoù kleizat nann-komunour evit tregemm ar gevredigezh na seveniñ un dispac'h gwirion ; o harpañ a ra enta dre goulzelouriezh, evit tizhout adreizhoù zo ha n'eo tamm ebet evit eilpeniñ ar gevredigezh a fell dezho mirout evel m'emañ, war-bouez nebeut.

SSSSSSSSSS

Ingal e vez tamallet ar 'gevalaouriezh' gant ar gleizourion ; petra avat a zo kuzhet dindan ar ger 'kevalaouriezh' nemet tolpadur

an impalaeriezhoù a fell dezho adkrouiñ mab-den. Uheloc'hik hon eus lavaret n'oa ket kredapl e teuje a-benn an emsavioù kleizour nann-komunour da grouiñ ur sevenadur pe ur stuzegezh nevez a zieubfe mab-den diouzh e arallekadurioù evit e ensezañ en e rezid klok, a-hervez. Ha kement-se a zo aes da gompren : ne c'hell an dispac'h komunour pe varksat rik bezañ kaset da benn nemet dre ar brezel, ha c'hoazh, ur brezel hollvedel pe gevandirel, da vihanañ. Betek-henn n'anavezomp bro vihan pe etre ebet a vije deuet d'ar gomunouriezh dre o nerzh o-unan ; Kuba zoken he deus graet he mad eus ar brezel yen etre U.R.S.S. hag U. S.A. ha n'he deus padet a-c'houdevezh nemet a-drugarez da skoazell armerzhel Rusia a brene he sukr diganti a-us d'an talskeul etrevroadel. Viet-Nam ha pobloù arall Indez-Sina n' o deus trec'h het nemet gant harp an daou vloc'h komunour a oa ouzh o skoaziañ ; erfin, nevez zo ez eo aet an tu-kreñv gant ar gostezenn gomunour harpet gant Moskov a-drugarez da skoazell Guba en Angola.

Ne zeuio al lañs da vat enta gant ar gomunouriezh - a zo disoc'h natur ar gleizouriezh - en Europa nemet war-lerc'h aloubidigezh ar rannved-mañ gant al lueoz rusian. Ne c'hellomp ket lavarout ez eo seurt darvoud gwirheñvel na tost dezhañ c'hoarvezout eveljust ; soñjal a ra deomp hepken n'eo ket dic'hallus ha kreidiñ a reomp ouzhpenn en devo seul vuioc'h a chañsoù da zegouezhout ma teuio ar riezoù da voazañ mui-ouzh-mui ouzh ar sponterezh atomel, pe diwar soñjal ne gredo an enebour biken kregiñ e-unan gant ur seurt brezel (neuze ne vefe implijet nemet an armoù 'klasel'), pe, c'hoazh, diwar spiañ e vo tu dreistvevañ evel-kent d'ur brezel a seurt-se : emañ Rusia o sevel goudorioù enep-atomel er mare-mañ, pezh na ra ket an Amerikaned hag a ziskouez ivez

e tremm ar Rusianed a-zevri ouzh degouezh ur brezel atomel. E degouezh ur brezel 'klas-el' avat ez eo peuzsur e vo skubet al lueoz alaman ha gall en un nebeut sizhunvezhoù ; n'eo ket hepken dre maz eo kalz dreist niver ar soudarded rusian d'ar re c'hall hag alaman pe zisteroc'h armerezh hag aveerezh nerzhoù-kad an Alamaned ha Gallaoued da re ar Rusianed hogen peogwir, diouzh un tu ez eo koazhet da vat ar vrogarantez alaman ha gall abaoe ar brezel diwezhañ ha dreist-holl, e-touez ar re yaouank e Bro-C'hall, a-c'houde 1968 hogen ivez o vezañ ma n'o deus al lueoz kornogat sevenadur na feiz ebet da zifenn : tra maz eo politikelaet a-grenn framm an ofisourion rusian, emouez a-hend-all ouzh gourlec'h o riez er bed, n'o deus framm an ofisourion gornogat nemet ur gevredigezh 'lieselour' da zifenn, hag ur c'heal nac'hus rik eus ar frankiz, ur goulloer e gwirionez ; Bro-C'hall n'he deus mui a-hend-all lorc'h ebet ha troet eo he renerion da varc'hadourion ganolioù ha kenwerzhourion divezh prest da zifoarañ o enor hag hini o c'henvroiz evit ur varikennad eoul-maen ouzhpenn. War ar marc'had ez eo gounezet an holl gefredourion c'hall d'ar gleizouriezh, da vihanañ. Penaos e c'hellfe hiziv komunourion ha kristenion c'hall difenn ur seurt Stad ? Ha ma rafe ar gristenion ne vefent lusket moarvat nemet gant an aon rak koll an tammig frankiz en em vataont diouti hogen a vrein anezho kerkoulz all. Hag evit an armoù atomel a zo e kerz ar C'hallaoued, sklaer a-walc'h eo ne c'hellint biken o arverañ anez barn o fobl d'an distrujidigezh klok : n'eus ket an disterañ goudor enep-atomel e Pariz zoken. N'eo ket diwirheñvel a-grenn enta e vefe dalc'het Europa ar C'hornog gant al lueozrusian un deiz bennak en amzer-da-zont.

Evel m'hon eus merket e sigur darvoudoù Portugal ha Spagn ne vez ket mui termenet tonkadur pobloù Europa ar C'hornog e framm ar riezoù dizalc'h war o fenn o-unan, - e framm Europa en he fezh, ne lavaran ket. Ne c'heller kompren pezh a zo c'hoarvezet e Gres, Spagn ha Portugal nemet e rez un Europa oc'h en em frammañ (a-barzh pell e vo dilennet ur Gambr Europat, petra bennak ma striv ar C'hallaoued evit mirout na servije seurt Kambr da vroudañ an 'emskiant-rannvro' en o riez-int). Ma teu avat gwask ar galloud rusian da vezañ pounner-oc'h ha tostoc'h gourdrour un trec'h komunour, dre al lezenn zoken, en Europa (kv.Italia), ez eo gallus e c'hoarife an europouriezh roll ar faskouriezh etre an daou vrezel evit parrat ouzh an arvar-se, nemet en ur par hag en ur c'hendegouezh disheñvel-krenn o vezañ ma ne vo harpet na gant ur riez kreizennet na gant ur gealiadurezh resis (ne weler ket mat avat e c'hellfe ur faskouriezh padout pell hep kealiadurezh ebet). Moarvat ivez e vo atoret an europouriezh enep-komunour gant ur riez kreñv en Europa, a seurt gant ar riez alaman feal d'ar Stadoù-Unanet. Hogen hevelep renad ne vo ket ur renad faskour-rik ; lezel a ray en o sav frankizouriezh ha 'lieselouriezh', hag he lec'h, peurgent, d'ur gleizouriezh leal ouzh feuremglev an Atlantel.

Evel m'hon eus lavaret, n'eo ket sur tamm ebet e vo gouest seurt kevread da herzel ouzh U.R.S.S. evit an abegoù bet meneget ganeomp endeo ; pezh a fell deomp diskleriañ hepken eo n'eur ket evit empennañ donedigezh renadoù faskour hengounel e riezoù Europa ar C'hornog en dibenn-kantved-mañ, - nemet, eveljust, e tegouezhfe un enkadenn armerzhel spontus a la-kafe an dizurzh da sevel e pep lec'h. Dre se n'en em ziskouezo kudenn arbennik ebet evit an emsaverion gristen da geñver diorreadur un

europouriezh a drofe goude da vezañ enep-komunour zoken, - nemet ar re ar re emaint o talañ outo er mare-mañ end-eeun.

0000000000

Klask a rin krennañ va mennoz evit klozañ:

- bez' ez eo ar gleizourion adreizhourion kevredigezhel nemetken ha na sevenint biken dispac'hgwirion ebet ; bez' e vo o zonkadur pe en em gevredañ en-dro gant ar gostezenn - pe, kentoc'h, ar c'hostezennoù 'dehouat' - evit tec'hout diouzh gwask ur strollad komunour trec'h dezho e pep keñver, pe bezañ sujet hag atoret d'ar strollad komunour kemeret gantañ ar galloud a-drugarez da zalc'hidigezh Europa gant al luez rusian ; n'eus forzh penaos ez eo enebet o stuzegezh hag o bedvezadur ouzh re ar gristenion wirion ha diles ;

- en Europa ar c'hornog n'eus nemet ar gomunourion a gement a vefe gouest da sevenañ mennad pennañ an dispac'h marksat hag a zo di-eubiñ mab-den war-bouez mestroniañ an natur dre al labour (bez' ez eo al 'labour', ar c'henderc'hañ, pennañ meizad an dispac'h-se) ; bepred en hor c'hevandir avat ne c'hellint kas an dispac'h-se da benn nemet ma vez aloubet ha dalc'het riezoù Kbrnogeuropa gant ar Rusianed ; e penn-kont enta, hervez ar reizhpoell, e tisoc'h al linenn bolitikel dispac'hel a-gleiz da harpañ diziviz ar galloud rusian ; ar stalinouriezh ez eo enta stumm kempoell ur politikerezh komunour gwir zispac'hel ;

- dirak ar saviad-se ez eo un tammig heugus a-berzh kristenion enouestlet en ur politikerezh kleizour tamall da gristenion all chom hep mont d'o heul, ober anezho 'dehoidi' en abeg da se, e-giz pa vijent prest da harpañ

n'ouzon peseurt strollad faskour e-giz Hitler pe vMussolini ergentaou, pa ouzer a-walc'h a-hend-all ne c'hell ar c'henlabour gant ar gomunourion nemet degas ur c'hristen da zilezel e feiz a-benn ar fin ;

- ha neuze, pe e kred ar c'hristen n'eus nemet an Aviel - ha petra eo an Aviel hep feiz er C'hrist evel Doue ha Salver ? - hag a c'hell salviñ an Denezh, pe neuze e ra eus an Aviel un traet santimantel mat hepken da zistanañ debron e vorc'hedoù personel ; d'ar mare-se n'eus ket ur c'hristen anezhañ ; ha c'hoazh, peogwir n'emaomp ket en ur gevredigezh kristen, pe e labour ar c'hristen evit kanttreiñ ar gevredigezh pe e paouez a vezañ kristen ; aze emañ an dazeilad evit ar c'hristen, ha n'eo ket en dibab etre bezañ a-gleiz pe a-zehoù(1) ; an dalc'h a chom gouzout avat ha bez' e c'heller labourat da gristenañ ar gevredigezh e par ar politikerezh ; er c'houlz-mañ, ne gredomp ket ; hogen se a vefe da studiañ, a soñj deomp ;

- erfin, e framm un emsav ha n'en em gemesk ket c'hoazh gant ur gevredigezh dinazel istorekaet da vat ne c'heller ket derc'hel kont eus un eneberezh etre kleiz ha dehoù, ar pezh a c'houlakafe e vefe an emsaverion rannet etre rummoù o terc'hel ur galloud bennak ha re all o klask o distroadañ ; e par ar gevredigezh c'hall hepken ez eus un eneberezh etre dehoù ha kleiz, etre bourc'hizion hengounel ha nevez-vourc'hizion ; ar re a garfe enta gwelout un disrann kleiz-dehoù e diabarzh an Emsav (paotred "Breizh Yaouank" koulz ha kleizourion vreizhat zo) en em laka e par ar rannvroelouriezh ; dre maz int rannvroelourion ez eo tonket d'o emgann menel azvanek ha didalvez peogwir e nac'h he finvez a-benn ar fin ;

(1) Rener ar gelaouenn ESPRIT e Paris, Domenach, a zo o paouez kompren an dra-se. Goude bezañ kemeret perzh er brezel etre renkadoù e klask difenn bremañ, da gentañ, ar wirionez.

En ur prantad tremen evel an hini m'emaomp o vevañ ennañ hag a laka Breizh da drokañ yezh ha kredenn dindan hon daoulagad(1) hon eus gwell d'ober moarvat eget derc'hel kont eus tamalloù ar "chaseourion sorserezed" a glask reiñ koustiañs fall d'ar gristenion evit ober anezho deñved o vegeliat mat da gas da stal ar c'higer.

Y.O.

~~~~~

(1) Va soñj-me eo e c'hell c'hoarvezout en Europa ar pezh a zo c'hoarvezet en Afrika an Hanternoz trizek kantved bennak zo, pa voe erlec'hiet ar vuzulmadegezh ouzh ar gristeniezh, hep ma chomfe an disterañ roud eus ar gredenn-mañ er rannved-se a-c'houdevezh. Ned eo al 'lieselouriezh' en ur gevredigezh unvaenek evel hon hini nemet ul louzoù-anesteziañ mat da derriñ da ziwezhañ sailhadennoù an hini toc'hor. Ar pezh a vefe un diskoulm d'ar gudenn n'eo ket eveljust ur gevredigezh unvaenek kristen adarre hogen ur gevredigezh distadel-aet liesempret, a rofe pep a chañs da bobloù dizalc'h o kenvevañ a-ziforc'h pe en un douez ; hogen en degouezh-mañ e vefe dav distreiñ d'an 'dezhvad personel' a zo e dislavar gant ar gwir stadel arnevez, abaoe an dispac'h gall peurgent.

KENSKRIVEREZH E SIGUR KEVANGEVREADELOURIEZH

"Deurus e kavan ar pennadoù pe al lizhiri a zo bet embannet diwar-benn kevangevreadelouriezh, hini M. Bastit hag ar respont graet gant Jil Ewan d'al lizher-se. War ur poent, da vihanañ, on a-du gant aozer an obereñn bouezus ez eo "EN DONVOR DA VREIZH" : ne c'heller ket en em harpañ hiziv war ur bloc'h brezhoneger en dije miret ijin ar yezh. Evel m'en deus merket Roparz Hemon gwerso, hanter-kant vloaz zo : da bep skrivagner eo adkavout ar yezh o pleustriñ hor skrivagnerion boblek kozh (o skridoù a vefe da adembann) hag o skrivañ e-unan : war-bouez skridaozañ bemdez eo e tap unan ijin ar yezh ha n'eo ket o terc'hel un tamm diviz - gwall verr bepred - gant kouerion hanter dizesket ar yezh ganto diwar-vremañ.

War boentoù arall avat e vefe da resizañ muioc'h mennoz Jil Ewan. Ar skrivagner-mañ, war a hañval, a gred e rank ar yezh bout gouest da gevezañ gant holl yezhoù meur ar bed hag e tlefe, enta, pleustriñ n'eus forzh peseurt tachenn eus ar ouezoniezh arnevez.

Hag e devoud hon eus gwelet SADED ergentaou o lakaat e brezhoneg danvezioù-kelenn a bep seurt : fizik, kimiezh, douaroniezh; bevoniezh h.a. Hag EMSAV a-c'houdevezh, o kempenn e brezhoneg dornlevrioù GURVITCH a-zivout



udoù. Eus ar bed-se avat ez eus tu lavarout en deus graet dre zegouezh hag hep mennout dezhañ an nebeud a vad bet degaset gantañ, nemet emañ o tougen e emzistruj ha distruj an denelezh penn-da-benn ma chom feal d'ar spered ez eo bet ganet hag awenet gantañ. Pa ouzer pebezh lorc'h divevenn a zo en diazez anezhañ e ranker bezañ sod-nay - evel m'eo bet emichañs darn eus perzhidi ar Goursened - evit faltaziañ ez eus tro da ganttreiñ anezhañ ;(sed avat pezh a zo gedet gant kristenion ar Goursened ha perak ez eo aet Pol VI d'ober e furlukin er B.U. evel ar c'hamarad Kroutchov e-unan).

Distroomp avat da levr Jil Ewan ha klas-komp plaenaat keal ar werinveliezh a vez meneget alies en oberenn ha lakaet gantañ da dalvezout d'ar c'henurzhiadur a zlefe an Iliz reiñ dezhi hec'h-unan. Daoust avat ha n'eo ket ar 'werinveliezh' engalvet ken alies en hon amzer netra nemet ur ouel taolet war gallowd un nebeut nemeurveliezhoù ? Se a zo aes a-walc'h stadañ e Bro-C'hall; eno ez eo mestr ur rumm renerion strizh tre hag a ra van da berzhiakaat ar boblañs er politikerezh. Hag en Iliz c'hall hec'h-unan, goursenedat a-walc' e-giz ma ouzer, hag a zo oc'h ober he renkoù e Breizh, me 'garfe gouzout peseurt gwerinveliezh a zo o ren enni ? Diouzh un tu e ra an dizurzh klok he reuz hep ma kredfe eskob ebet herzel outi a-zevri (ne welan-me ket peseurt gwerinveliezh a zo en dispac'hadeg); diouzh un tu all en em vod an eskibion c'hall en o ferzh o-unan, hep darempred ebet na gant ar Pab na gant ar bobl gristen ez int karget da ouarn, a-hervez, en ur bodad-ren digefridiel... a sent marteze, a-benn ar fin, ouzh un toullad kengorioù dirgel a arbennigourion ha na oar den re vat gant piv int amparet nemet a vez o sturiañ durc'hadur an Iliz c'hall penn

da-benn. Me 'garfe gouzout peseurt gwerinveliezh a zo e kement-se. Moarvat ne gred mui an eskibion c'hall e Breizh barn an emrenerion ; frankiz klok a vez roet d'ar gristenion e-keñver politikerezh. Hogen da betra e servij ? Distuz evel maz eo ar gristenion hiziv - ha war wall piv ? - ne zalc'hont kont ebet eus mennad an Iliz ha retvezioù o feiz evit ren ur politikerezh a zo deuet da vezañ evito un tu da renaviañ o relijion hep gouzout na mennout dezho o-unan. Maz eo gwerinveliezh en he gwellañ kemer perzh da vat en argerzh un aozadur pe ar gevredigezh dre vras ez eo ret anzav n'eus ket bet graet an disterañ kammed war an tu-se en Iliz Vro-C'hall. Dav eo bezañ gwall zidro eta evit komz eus araokadennoù ar werinveliezh - termenet evel m'hon eus graet uheloc'h - en Iliz c'hall pe en Ilizoù all dre ar bed.

Hogen daoust ha mat eo zoken implijout ar ger "gwerinveliezh" pe "demokratelezh" evit eztaoliñ keal ar c'hemperzhiezh dinazel a fell da Jil Ewan talvezout gant ar ger-se ? Rak notit emañ a-du penn-da-benn gant an uhelvennad kinniget gant Jil Ewan dre seurt termen. Moarvat, d'ar c'hentañ sell, e hañval ar werinveliezh bezañ bet ur wellaenn e-keñver ar renadoù unpennat pe c'hladdalc'hel a wechall gozh. Ha gwir eo he deus aotreet an deskadurezh d'ar yoc'h kemer perzh er politikerezh dre an hollvouezhiañ. Er gevredigezh c'hreantel diorreet avat, e-lec'h emañ kreizennet spontus ar galloud ha kemmesket alies gant ur galloud armerzhel ken kreizennet all, kalz mui eget er renadoù gladdalc'hel a wechall, ez eo disteroc'h, e penn-kont, intrudu ha perzhiadur politikel an hinienn eget ne oa e-barzh keodedoù an henamzer, lakaomp. Penaos, e gwirionez, e oufe an hinienn herzel ouzh gwall lev-ezon ha moustrerezh un deskadurezh reolet

a-grenn gant ar Stad pe ur Wask en em gav en he fezh etre krabanoù un nebeut strolloù kevalaour ?

Rizhiek(1), gaouiat ha diwirion eo eta ar rezhiadoù a anver "gwerinveliezhoù", poblek pe get. War ar marc'had, goveliet eo bet ar ger-se gant ur skol brederourion a venne diogeliñ emrended mab-den e-keñver Doue ; er werin e poste pep belielezh ha, dre se, en diwezh, ez enwirie mab-den da dermeniñ ar mad hag ar fall. Gouzout a reomp ne oa kement-se nemet touell : re aes eo lorbiñ pe wallañ ar yoc'hoù a zo karget, a-hervez, da envel ar renerion hag a vefe atebek dirazo. Gant ar werin avat ez eo bet dilennet Adolf Hitler, da skouer. E devoud eta ne zisoc'h reolenn ar muianiver a zo e diazez ar werinveliezh, en diwezh, nemet da brofañ d'un toullad mistri ar galloud ha mac'homerion ur veli diharz ha doueek koulz lavaret.

Me 'oar mat n'eo ket eus ur seurt gwerinveliezh ez eus kont gant ar gevangevreadelourion hogen, dres, re uzet eo seurt ger, re deuc'het, re amsteriek evit talvezout un uhelvennad a c'hellfe bezañ kemeret gant ar gristenion rak, ken er gouarnerezhioù bourc'hiz-kevalaour, ken er renadoù sokialour-groñsrenat, ne dalvez ar ger-se netra ken evit ar mare ; lec'hiañ a ra ar gristenion en ur c'hendalc'h istorek n'o deus bet perzh ebet ennañ. Netra ken.

Sorc'henn ur 'werinveliezh faltaziek' a zo moumounet hiziv gant kristenion an eil gouezh-brezel e Bro-C'hall bet stummet er 'Resistañs' gant difeiz idi deuet da vezañ o mistri a zo troet eta d'un hent-dall. Degaset he deus ar gristenion er vro-se da veuziñ e lagennoù ur politikerezh a yoc'h azvanek ha diefed ha da gouezhañ er 'vedel-

(1) "Illusoire" Ivez : "Azvanek".

ouriezh' hag ar 'bolitikelouriezh' endeeun ; ha meizourion zo evel Teillard pe oberiadourion evel an Tad Lebret n'o deus graet nemet gwashaat ar walenn, an hini kentañ o lakaat ar gristenion da gouezhañ en un denelouriezh wellwelour berrboell, hag egile o reiñ da grediñ dezho ez eo a-walc'h diskoulmañ kudennoù armerzhel pe gevredigezhel evit krouiñ ur gevredigezh kristen dres, - pe, kentoc'h, ne oa ket ezhomm a-benn ar fin eus feiz ebet peogwir e c'helle an dud a youl vat (komunourion h.a., a soñjo e ziskibion) sevel ur gevredigezh kristen e-giz pa vije ar vuhezgezh-vat ar pep pennañ eus diskulidur an Aviel, ur gevredigezh kristen hep kristenion na feiz ebet, diouzh ret, a-benn ar fin. Gant ar mennoziou souezhus-se - daoust ma ne anadont nemeur en un doare fraezh er mell pikol lizheradur bet skridaozet da geñver ar Goursened, ez eo bet awenet kalz eus levezonusañ perzhidi hemañ. Klasket ez eus bet d'ar mare-se reiñ ur 'satisfecit' d'ar bed arnevez krouet gant ar yourc'hizion ha na c'houlennent ket, moarvat, kement a enor ; notit mat ivez n'oa ket anv neuze c'hoazh a reiñ hevelep bennoz d'ar bed sokialour. Ar bed a oa savet d'ar barr-uhelañ gant Teillard a oa ar bed amerikan, hini an araokaat peurzalc'hus ha peurbadus. Moarvat e oa disheñvel mennad an Tad Lebret a felle dezhañ kempenn an armerzh diouzh ezhommoù gwir natur mab-den. Stadañ a ranker koulskoude n'eo ket aet pobloù an Trede Bed da c'houlenn ali digantañ da vat (van o deus graet hepken) ha soñjal a c'heller ivez ez eo bet kiriek - pe, kentoc'h e ziskibion - d'un doare armerzhelouriezh arbennik a denne da ziren an den d'e vent armerzhel ha politikel, ha kement-se daoust d'e youl da dizhout ar pal kontrol, netra nemet war-bouez ar renk kentañ a roe d'an armerzh



Oc'h adlenn an tamm skrid digempenn-mañ e verzan ez on pellaet diouzh va dezo kentañ hag a oa plaenaat levr Jil Ewan. Ret eo din lavarout eta ez on bet dudiet-bras o lenn levr ar skrivagner-mañ : bez' ez eo EN DONVOR DA VREIZH an oberenn bolitikel bouezusañ a gement a vije bet savet e brezhoneg abaoe dek vloaz bennak. E gwirionez en deus gouezet Jil Ewan kaer-kenañ kendeuziñ ar yezh lennek hengounel hag ar yezh arnevez ; ur gwir skrivagner a zo anezhañ ha kavet em eus e yezh bepred eus ar c'hwekañ. Prest on da grediñ en devo al levr-mañ kement a bouez en hol lennegezh vrezhonek-ni, hag an "Esprit des Lois" el lennegezh c'hallek. Se eo a felle din lavarout o klozañ ar burutelladur-mañ ha n'en doa da vennad nemet sklaeraat krafoù zo bet meret en e oberenn.

J.B.

ISTOR AN EMSAV

An emsav dres a-raok an  
eil brezel bed : ar gelaouenn WAR-DU AR PAL

Embannet e voe ar gelaouenn WAR-DU AR PAL evit ar wech kentañ e deroù ar bloaz 1938 ; nevez amzer 1938. Paouez a reas a zont er-maez er bloaz war-lerc'h, da zerc'hent ar brezel ; evel meur a gelaouenn all e voe harzet gant an darvoudoù. En holl enta ne voe moulet nemet teir niverenn a vent vras 21x27. Doareet kaer a-walc'h e oa an dastumadenn-mañ daoust ma ne oa ket ken splann ha STUR hogen luc'hskeudennoù brav a gaved enni ; disteroc'h e oa ar paper, avat, ha ne oa ket moulet ken fraezh.

Kerneviz a oa eus an darn-vuiañ eus ar skrivagnerion ; en ur stumm e c'hellfed lavarout ez eo bet WAR-DU AR PAL ur gelaouenn gernevat. Renet e oa gant ar vreudeur Delaporte eus Kastell-Nevez ar Faou, Youenn ha Remont (hini ebet anezho avat ne sine din-dan e anv ; Yeun Douguet hag Herve Kerhor a oa o anv-ioù-pluenn, ma ne fazian ket) ; Gab ar Moal a genlaboure gant ar vreudeur Delaporte hag, ivez, Yeun ar Go, ar skrivagner, o-daou eus Kernev ivez, evel Youenn Drezen a embannas meur a varzhoneg (dister a-walc'h) en dastumadenn-mañ. Dav eo merkañ e kaver sinadurioù all e-barzh ar gelaouenn : Lan ar Bihan, da skouer, a hañval bezañ unan gant Yeun ar Go ; Nedeleg ha Natalis avat ne ouzomp ket mat piv int. Unan hepken a sine gant e anv kefridiel : Paul Gaignet, ur Roazhonad, an hini nemetañ ha na oa ket Kernevad ; nemet savet e oa bet er skolaj Sant-Marzhin e Roazhon end-eeun ha bez' e oa anezhañ ur C'hatolig ; rak, dre vras, e oa katoliked eus ar skrivagnerion a blede gant ar gelaouenn-mañ ha savet o doa WAR-DU AR PAL evit embann



enni aesoc'h mennozioù ha n'o dije ket kavet bod e-barzh kelaouenn Olier MORDREL, hag a oa d'ar c'houlz-se kelaouenn-studi damgefridiel ar Strollad Broadel, STUR he zalbenn (1).

~~~~~

Divyezhek e oa ar gelaouenn-mañ ha disheñvel er c'heñver-se diouzh STUR a oa skridaozet e galleg hepken. Gant renerion WAR-DU AR PAL avat e oa distaolet ken emzalc'h Roparz Hemon ha Meven Mordiern hag a nac'he ober gant ar galleg ken hini STUR a oa techet da ober eus ar galleg ur yezh lennegel vreizhek (kv. barzhonegoù gallek Brython - Olier Mordrel - e-barzh ar gelaouenn-mañ.) Kavout a rae d'ar re a oa e penn WAR-DU AR PAL e oa a-walc'h lakaat ur c'hrennad brezhonek eus ar pennadoù gallek embannet evit diskoulmañ ar gudenn. Ar skridoù brezhonek a gaver e-barzh an dastumadenn a zo talvoudus dre ma klaskont diorren ur yezh uhel a-walc'h hogen diskouez a reont ivez ne oa ket an aozerion anezho evit tennañ koulz implij eus o yezh vroadel hag eus ar yezh estren ; skors, teuc'h ha treut e oa o brezhoneg a-wechoù ; evit treiñ ' armerzhouriezh' e raent gant 'skiant ar binvidigezh'. Ne gredan ket ez arverent hevelep troiennoù hir ha diresis dre ziouiziegezh, - evit tizhout, war asoñjent, lennerion dizesk, ne lavaran ket. Ne oa ket skrivagnerion WAR-DU AR PAL, hag int brezhonegerion o vevañ er Goueled evit koll ar spi e vije bet lennet ha komprenet seurt skridoù gant n'eus forzh peseurt brezhoneger diwar ar maez.

~~~~~

Peseurt mennadoù a oa d'ar gelaouenn ?  
Ret eo lavarout ne oa ket WAR-DU AR PAL ur gelaouenn bolitikel rik, na zoken ur gelaouenn a studi  
-----  
(1) Notomp e oa Noury, ur C'hernevad all, teñzorier ar gelaouenn.

nemetken. Notet em eus dija e kaved en he fajennoù barzhonegoù gant Youenn Drezen ; gant an hevelep aozer e c'heller menegiñ un droidigezh diwar skrid saoznek Syngé a oa diouzh ar c'hiz en amzer-se : "An draonienn hep heol". Moulet ez eus bet enni ivez rolloù-gerioù poblek gant Yeun ar Go : "Gerioù brezhonek bev nebeut anavezet gant ar skrivagnerion" Er gelaouenn-se ivez ez embannas Yeun ar Go ur gontadenn gaer : "Sinadoù". Notomp ivez, gant ar memes skrivagner bepred, ur studiaden : "penaos niveriñ ha kontañ e brezhoneg" e-lec'h e saved a-enep da arnod Roparz Hemon da eeunaat an niveriñ e brezhoneg ; un nivererezh broadel-rik a ranke kontañ dre ugent ... betek daou-c'hant ; 195, da skouer, a oa troet evel-henn : pemzek-ha-nav-ugent. Er c'heñver-se e oa mirour a-grenn ar gelaouenn. Hogen testennoù liesseurt a veze meret er gelaouenn : gant Yann Goulet, eus NEVEZADUR, da skouer, e oa bet embannet ur studiaden a-zivout ar skulterezh breizhat.

Pezh a zo deurus ha deverrus ivez er gelaouenn ez eo an dezrevelladennoù a gaver enni diwar-benn buhez ar vro-mañ hag ar broioù keltiek all. Dedennus e oa, lakaomp, pennadoù Nedeleg diwar-benn Iwerzhon d'ar mare-se, dreist-holl istor an darempredoù etre gouarnamant Iwerzhon ha gouarnamant Bro-Saoz d'an ampoent ; ivez ar rentaoù-kont eus ar prosezou a oa graet er bloavezhioù-se da renerion ha da stourmerion ar Strollad Broadel, eus buhez ar strolladoù hag ar c'hevredigezhioù breizhek a blede gant Breizh d'ar c'houlz-se (niverus ha liesseurt e oant). Ne oa ket gwall sklaer ar mennozioù bepred avat ; o komz eus obererezh "Ar brezhoneg er skol" renet gant Yann Fouere en amzer-se e klasked reiñ da gredif ne oa ket un afer politikel eus kelennerzh ar yezh er skolioù.

~~~~~

A-benn ar fin, petra ' oa mennad ar gelaouenn?
War a seblant e klaske herzel ouzh brizh-kevrinadeg-
ezh STUR ha BREIZ ATAO d'ar c'houlz-se. Fellout a rae

da renerion ar gelaouenn, er c'hontrol, reiñ un diazezh poellek d'an emsav, pezh n'o doa ket graet, war o meno, na Mordrel na Debauvais, hep kontañ diaraogerion ar re-se, M. Marchal, da skouer. Ar gwellañ evit sklaeraat ar mennad-se eo menegiñ un nebeut arroudennoù tennet diouzh ur pennad embannet en niverenn gentañ, e galleg hag e brezhoneg, hervez giz ar gelaouenn. An doare brezhonek a venegimp hepken. Er penn-kentañ ez asurer ez eur mennet da studiañ kudennoù Breizh e framm Breizh hepken (pezh a oa kavout abeg e soñj ar re a wele ar silvidigezh evit Breizh en emdroadur ur "Weltpolitik" renet d'ar c'houlz-se gant an Alamaned ; Pobl Vreizh a vo kemeret da dest ha da vestr); ne vo klasket kentel ebet diouzh pobl all ebet. Goude bezañ merket n'he deus gounezet pobl Vreizh netra diwar renadurezh ar C'hallaoued en o bro abaoe an dispac'h gall 1789, da lavarout eo, "nav bloaz ha seizh-ugent" (kement-se a zo anzavet gant an hini ar muiañ aheurtet a-du gant mennozioù an dispac'h gall, gouez d'ar gelaouenn), goude bezañ graet anv eus an diskoulmoù kinniget da gudenn Vreizh : rannvroelezh, kevreadelezh e framm Bro-C'hall pe Europa, an disrann diouzh ar Stad c'hall, e tiskleir ar skrivagner :

"En ur studiañ doareoù ar bobl vreizhat e vezo dizoloet he youloù, he menozioù diwar-benn ar vuhez, an Den hag ar Bed, hag e vezo kavet dre-se un anaoudegezh splann eus ar vuhezgezh hag ar brederouriezh a zo ret dezhi da gaout evit tizhout pal pennañ he ferzhioù-mat."

"En ur vevañ e-touez ar werin, en ur deurel evezh war he zroioù-spered, war stummoù hec'h arz poblel, e vezo kavet danvez ur sevenadurezh vreizhat e gwirionez..."

Amañ moarvat e kaver levezon eus ul levr evel "Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh", dreist-holl ar pennad "Anaoudegezh ar werin" e-lec'h e tispleg ar skrivagner ez eo an tu nemetañ d'en em ziestrenekaat eo distreiñ d'ar werin a zo chomet glan diouzh ar sevenadur gall ; seurt mennoz a gaver

aliesik gant stourmerion ar prantad etre an daou vrezel ha zoken goude ar brezel diwezhañ (kv. an dastumadenn GWERIN bet embannet er bloavezhioù c'hwegont.) Ne nac'han ket, eveljust, he dije miret ar werin teñzor hor speredegezh hengounel, pell emañ, hogen koulz eo anzav ez eo ar speredegezh-se hiziv ken displeberet ha maz eo ar yezh hec'h-unan dre berzh a levezon ar sevenadur stadel gall ar-nevez, e skolioù hag e yoc'hstlenn : hiziv an deiz ez eo marv ar speredegezh vrezhon, nemet en hengoun an emsaverion end-eeun.

Kendalc'homp avat gant hon diviz. Pelloc'hik e welomp peseurt kentel a vroadelouriezh a felle d'ar gelaouenn reiñ da baotred STUR :

"Ha ma teufe an devezh e vefe ret reiñ d'ar bobl-se un doare stad politikel, arabat e vefe mont da c'houlenn gouloù digant an estren ; dav e vefe gwelout an doare a zere ar gwellañ ouzh youloù pe vennadoù ar bobl vreizhat ha nann mac'homañ he spered gant lezennoù graet evit tud all."

Merzet hoc'h eus moarvat evel don va-unan pegen goloet eo ar c'homzoù-mañ, pegen fur, pegen evezhiek ez int. Anat eo ne fell ket d'ar skrivagner anaouzañ na feukiñ den ebet. Sklaer eo koulskoude ster an arroudenn e kenedgezh politikel an ampoent : ne fell ket deomp mac'homañ Breizhiz gant ur gelennadurezh evel hini ar genelwerinelourion a zo graet mar-teze evit an Alamaned hogen tamm ebet evit Breizhiz a zo hag a zle chom kristen. Amañ enta e taged STUR hag he c'helennadurezh hep o envel.

Ne vern penaos ez embanno WAR-DU AR PAL ne ven ket reiñ da gudenn Vreizh un diskoulm aozet war ar prim, e-giz STUR bepred, ha gwellwelour a-walc'h e oa evit diogeliñ e tlee an diskoulm bezañ kavet ha degemeret gant ar Poell :

"Eus al labour reizh, pizh ha leal e teuio tamm ha tamm ar pare d'an diaezamant a zo e Breizh..."

Skouerioù eus al labour-se "pizh ha leal" a a gaver a-hend-all e-barzh an niverenn-mañ, er pennad savet gant Paul Gagnet, eus Roazhon : "Réflexions sur l'économie bretonne" ha na ra e gwirionez nemet goulenn e ve studiet ar gudenn en un doare diuntuek hag ergorek (ken 'ergorek' e fello da bPaul Gagnet bezañ e gwirionez ma c'hoarvezo gantañ dizarbenn tezennoù zo eus al levr "Bretagne 38" bet aozet evit kas d'an trañ mojenn 'Breizh paour') Ur skouer all a ergoregezh a vezo kavet e-barzh pennad Gab ar Moal diwar-benn an divroerezh, ennañ niveroù ha taolenoù resis e sigur ar Vrezhoned aet d'ober o annez e rannbarzh Paris.

Gwelet hon eus e oa troet ar gelaouenn moarvat a-enep da gelennadurezhioù zo, hini ar genelwerinelourion peurgetket. Se a c'heller merzout dreist-holl war an trede niverenn e-lec'h emañ studiet kudennoù ar ouenn hag ar ouennelouriezh. Gant an anv-pluenn 'NATALIS' eo bet sinet ar pennad-mañ ha mennet e oa da vurutellañ ar skridoù a oa bet moulet e-barzh ar gelaouenn STUR war an divoud-se. Tamall a ra Natalis' da baotred STUR ober gant 'menozioù ameeun ha kammgemmesket'. Re bell e oa ar sterioù hag a roed d'ar gerioù 'gwad, gouenn, pobl'diouzh ar sterioù poblel. Dre vras e vurutell ar pennad tezennoù ar genelwerinelourion alaman diwar-benn ar ouenn d'an ampoent-se. N'eus ket a ouenn digemmesk, eme Natalis. Hervez arbennigourion ar 'Rassenkunde' ('gouennoniezh') - anv a oa graet eus Hans Günther - ne oa ket ouzhpenn 10% a nordeion rik e Bro-Alamagn. Lakaat a rae aozer ar pennad Gobineau ha Nietzsche kiriec d'ar gelennadurezh nevez diwar-benn ar ouenn, ar pezh na oa ket gwir a-grenn (hervez ar gelennadurezh-se e teue an hironerezh da gemer lec'h ar 'pec'hed bonel'). An iskisañ avat eo ne varne ket WAR-DU AR PAL a-grenn ar ouennelouriezh peogwir e tisklerie Natalis e oa a-du gant ar pezh a oa bet embannet e-barzh STUR diwar-benn ar "ouennelouriezh vreizhat" :

"Il ne s'agit pas ici d'une doctrine d'Etat ou d'une pseudo-religion," emezañ.

Hogen war un dro e voule skrid klok ar varnedigezh a oa bet nevez douget neuze gant an Iliz (ez resis, gant 'Kenvreuriezh ar c'hloerdioù hag ar skolioù-meur' a-enep d'ar ouennelouriezh alaman.

Evel ma weler, ne oa ket sklar-tre atav emzalc'h ar gelaouenn, - lent hag amsteriek, ne lavaran ket. Diouzh un tu e klasked lakaat al lennerion war ziwall ouzh kelennadurezhioù zo, - a oa diouzh ar c'hiz hag a zedenne darn eus ar stourmerion d'ar mare-se, - ha diouzh un tu all ez embanned, dre spered ergorek, ev-eljust, ur studiadenn savet gant Yeun Douguet, - Youenn Delaporte, - , kelenner war an istor, a-zivout hanez an diplomaterezh en Europa goude ar brezel kentañ, ur pennad hag a denne da zidamall an Alamaned d'ar c'houlz-se, dre ma tiskoueze ne oa feuremglev Versailles nemet mac'homerezh ha fars ; gwir e oa an dra -se ; feuremglev Versailles n'oa ket ur feuremglev a beoc'h, - unan a zismegañs, a waskerezh hag a breizherezh, ne lavaran ket. Hogen ne oa mui poent kounañ kement-se d'ar mare ma oa deuet an Alamaned da vezañ gwaskerion d'o zro, oc'h aloubiñ Aotria ha Tchekia. Diskuliañ andial ma oa bet feuremglev Versailles a oa didalvez adal na venned ket harpañ ar genelwerinelourion alaman en o embregadennoù impalaerel a neuze.

Forc'hellek e vane ar gelaouenn dre ma ne oa ket ar genlabourerion anezhi ali kenetrezo. E deroù an eil niverenn, da skouer, e tiskleir Herve Kerhor "Ne fell ket deomp enebañ ouzh kelaouenn ebet... tizhout an diavaezelezh..." Da lavarout eo, klask a rae WAR-DU AR PAL lennerion er-maez eus an emsav boutin hag e felle d'he renerion tuta danvez stourmerion e-barzh kelc'hiadurioù nevez ; a-hend-all, gant STUR, BREIZ ATAO hag ar Strollad broadel dre vras e kendalc'hent da genlabourat. Pelloc'hik e lenner en hevelep pennad dalc'hmat : "E-touez ar genlabourerion e kaver tud hag o deus kredennoù disheñvel-kaer etrezo... Rak-se hon eus-ni nac'het argas den ebet diarnod..." A-benn ar fin e oa kement-se ur gwander. En un degouezh dispac'hel evel hini ar bloavezhioù 1938-1939 e vije bet gwell kaout en emzalc'h start ha dibleg, ha dibab un hent eeun e-lec'h termal evel ma raed.

PENAOZ EMAN KONT GANT AR SAVEREZH-YER

HAG AR BOUEDIJINEREZH YER-HA-CHATAL E BREIZH

Reiñ a raimp un nebeut sifroù a roy tu da dermeniñ saviad an ijinerezh-se e Breizh.

Kenderc'herezh ar poñsined (1974)

1) BRO-C'HALL (niver ha barregezh ar gorerezhioù)

Hollad :	Pennoù-yer	houidi	yer-indez	yer-briket
	649(N)	54669(BK)	123(N)	86(N) 6783(BK) 87(N)
			3850(BK)	7022(BK)
<u>Barregezh</u>	84	31	79	81
<u>keitat(1)</u>				
<u>Gorerezhioù</u>	135	11	19	18
<u>bras</u>				

2) BREIZH-4

Hollad :	75(N)	13745(BK)	9(N)	91(N)	8(N)
			953(BK)	4388(BK)	2095
<u>Barregezh</u>	180		106	209	262
<u>keitat(1)</u>					
<u>Gorerezhioù</u>	27		3	14	4
<u>bras</u>					

Notenn. N=niver BK= Barregezh keitat (1) Dre viliadoù.

War-dro 10% eus ar gorerezhioù bras a zo staliet e Breizh (gant kevaloù gall, moarvat).

Teir gwech pouezusoc'h eget hini ar gorerezhioù gall eo barregezh keitat ar gorerezhioù e Breizh.

Ment kenveriet ar gorerezhioù

E Breizh emañ an holl poñsined kenderc'het e dalc'h ar gorerezhioù a zo dezho ur varregezh dreist da 100 000 vi, koulz lavaret.

- 99,6% evit ar yer-dozviñ (Bro-C'hall:91%)
- 96% evit ar yer da-zebrîñ (Bro-C'hall:88%)
- 67% evit ar poñsined kemmesk (Bro-C'hall:

45%) Evit ar seurttennoù all ez eo uheloc'h tolpadur ar c'henderc'herezh e Breizh eget e Bro-C'hall.

Kenderc'had ar poñsined undevezh

E Breizh e kaver :

• ouzhpenn an tri-c'hard eus kenderc'had ar yerigoù-indez hag ar yerigoù-briket e Bro-C'hall; - war-dro 40% eus kenderc'had ar yerigoù revet ;

- un drederenn eus ar poñsined da-zebrîñ.

Pa genverier e par ar c'henderc'hadoù pleusket e stader e vez Breizh oc'h ezporzhiañ poñsined undevezh.

Kenderc'had poñsined e 1974 (dre viliadoù)

	Bro-c'hall	Breizh	dregantad
Poñsined da-zebrîñ	348749	96 214	28%
Yerigoù da-zozviñ	36 850	15 678	43%
Kilheienigoù da-zebrîñ	15 067	5 270	35%
Gouennoù kemmesk	28 839	7 843	27%
Yerigoù-indez	44 544	33 337	75%
Yerigoù-briket	29 301	22 978	78%

GENNAD AR BOUED-CHATAL

Emdroadur ar c'henderc'h

Dre vras ez a kenderc'hadur ar boued-yerennoù kalz gorrekoc'h war-raok eget ar c'henderc'hadurioù all. Da gement-se ez eo kiriek ijinerezh pouezus ar boued-moc'h ha diorreadur herrek boued-

ijinerezhioù all evel ar boued-laezh evit ar pennoù-saout yaouank. Padal ez a kenderc'hadur ar boued-yer e Breizh kalz buanoc'h war-raok eget e Bro-C'hall.

E Bro-C'hall end-eeun ez eo bet lieskementet dre dri pleuskadur ar boued-chatal ; e Breizh avat ez eo bet lieskementet dre 8 hag hini ar boued-yer dre 4. Kement-se a ziskouez ez eo kresket da vat desaverezh an anevaled e Breizh.

E 1973-74 ez eo bet torret da dizh-kreskiñ an ijinerezhioù-se hogen n'eo ket an digresk-se ken anat e Breizh.

E 1974 ez eus bet kenderc'het e Breizh un drederenn eus ar boued-chatal pleusket e 'Bro-C'hall' ha 37 eus ar boued-yer.

E Breizh eo implijet 43% eus ar boued-chatal pleusket e Bro-C'hall (dreist-holl evit ar yer-indez hag ar yer briket) nemet dister tre ez eo ar boued-konikled.

E Breizh ez eus bet kenderc'het 3 622 000 tonennad boued-chatal, 38% diouto en 'Aodoù-an-Hanternoz', 25% er'Morbihan', 18% en'Il-ha-Gwinun' ha 18% e'Penn-ar-Bed.'

Er Morbihan hag en Aodoù-an-Hanternoz ez aozer dreist-holl boued-yer, - boued-chatal avat e Penn-ar-Bed hag en Il-ha-Gwinun.

E Breizh bepred ez a en-dro un tammig ouzhpenn 90 greanti boued-chatal diwar 900 war dirigezh ar Riez c'hall.

Well-wazh en deus kenderc'het pep greanti e Breizh 40 000 tonennad boued e 1974 (12 000 evit pep greanti e Bro-C'hall). Rankout a reer diskleriañ ment keitat uhel ar greantioù er Morbihan dre an niver bihan anezho; e-touez ar re-se ez eo bras niver ar greantioù boued-yer.

Tolpet kenañ eo enta kenderc'herezh ar boued-ijinerezh evit al loened e Breizh ; seurt tolpadur a c'heller kenveriañ ouzh an hini a gejer hantañ e broioù hanternoz Europa.

Savet eo eus 262 e 1968 da 531 e 1971 niver ar saverezhioù-yeer, enno en tu-hont da bemp mil yar. War un dro ez eo pignet eus 21,9% da 93% dre-gantad ar yer er saverezhioù meur a seurt se. Herrek meurbet eo bet enta tolpadur an ijinerezh-se. Ar buanañ eo kresket niver ar saverezhioù-yeer maz eus enno ouzhpenn 10 000 yar ; peurgent, savet eo eus 149 da 345 niver ar saverezhioù-yeer-da-zebrin etre 1968 ha 1973 ; etre 1968 ha 1972 ez eo savet kenderc'had ar pennoù-yeer eus 46,9 milion da 66,2 milion (kresk : 41,2%).

Ar saviad e Penn-ar-Bed

En departamant-se ez eo ar brasañ ment ar saverezhioù :

- 86 saverezh-yeer o terc'hel en tu-hont da 10 000 yar (38% eus an holl saverezhioù-yeer gwit-ibunan) ; 76% eus hollad ar yer (73% e Breizh dre vras).

Abae 1973 ez eo bet tolpet muioc'h c'hoazh emichañs an ijinerezh-se.

GENNAD AN DISKAREZH

E 1974 ez eus bet diskaret e Breizh un drederenn eus ar c'hig-yeerennoù (div drederenn evit ar yer-indez).

Kresket eo an diskarezh eus 10% etre 1973 ha 1974 (4% e Bro-C'hall) ; dleet eo kement-se da niver ar yer-indez o kreskiñ (tra ma tigresk er c'hontrol hini an houldi hag ar yer-briket).

Ment an diskarezhioù

Niveret ez eus bet ur c'hant bennak a ziskarezhioù e Breizh (diwar 1900 e Bro-C'hall penna-da-benn).

6,5 uheloc'h eo ment keitat an diskarezhioù e Breizh eget e Bro-C'hall (1950 tonennad e Breizh e-keñver 500 tonennad e Bro-C'hall).

E Breizh e vez graet war-dro 70% eus hollad ar c'henderc'had yer gant 17 diskarezh o plediñ gant ouzhpenn 500 yerenn bep sizhun ; e Bro-C'hall

avat ne bled ar brasañ diskarezhioù - 38 en holl - nemet gant 45% eus ar c'henderc'had hollel.

Dister tre eo e Breizh ivez niver al lazerezhioù bihan. Da gement-se ez eus daou abeg : enk eo ar bevezerezh war an dachenn ; o c'hreñv o deus kemeret an embregerezhioù meur diwar goust ar re vihan a zo bet skubet ganto diwar o hent ; tonket eo da Vreizh ezporzhiañ seurt kenderc'h ha kement-se an hini eo en deus roet lusk d'an embregerezhioù meur end-eeun.

Degouezh Penn-ar-Bed

E 1974 ez eus bet kenderc'het 55 000 tonennad yerrennoù gant ar 15 diskarezh eus Penn-ar-Bed (3 688 tonennad dre vras e pep diskarezh).

E-lec'h-all e tibenn ment bras pe vrasoc'h an diskarezhioù diouzh maz eus yer-indez da bleidiñ ganto pe get, er Morbihan, pe diouzh ment bras pe vrasoc'h ar saverezhioù, en Il-ha-Gwinun.

GENNAD AR PAKEREZH-VIOU

E Bro-C'hall eo savet niver ar vioù pakerezh eus 6,2 milmilion da 6,9 milmilion e 1973-1974 (kresk : 12%) ; e Breizh ez eo savet ar c'henderc'had eus 2,1 milmilion da 2,5 milmilion (kresk : 17%).

Kenderc'had ar vioù lakaet er c'henwerzh a ya d'ober 36% eus kenderc'had Bro-C'hall.

E Breizh ez eo bet niveret e 1974 232 pakerezh-vioù e 1974 (320 avat e 1973 ; digresk : 27% ; - 7% a zigresk hepken avat e Bro-C'hall : 2 870 e-lec'h 3 077).

Uheloc'h eo avat e Breizh niver ar pakerezhioù a bled gant ouzhpenn ur milion a vioù (140 e-lec'h 127).

13 pakerezh oc'h ober war-dro ouzhpenn 50 milion a vioù o deus pledet gant 59% eus ar c'henderc'had vioù lakaet er c'henwerzh. Savet eo niver keitat ar vioù pakerezh eus 97,9 milion e 1973 da 112,8 milion e 1974, pezh a ziskouez ad-

arre ez a an tolperzh buanoc'h e Breizh eget e Bro-C'hall.

EZPORZHIADURIOU YERENNOU HA KONIKLED EUS BREIZH

E 1974 he deus Breizh ezporzhiet hogoziq 44 000 tonennad kig-yerennoù (77% eus kenderc'had Bro-C'hall), pennoù-yeur ha per ar pep brasañ eus ar c'hementad-se avat.

Vioù en o c'hrogen

Etre 1973 ha 1974 ez eo kresket eus 46% ezporzhiadurioù vioù en o c'hrogen eus Bro-C'hall ; ezporzhiadurioù Breizh avat (anezho an 3/4 eus Bro-C'hall) a zo kresket buanoc'h : 57%.

Pourchas a ra Breizh en hec'h unan 80% eus vioù Bro-C'hall a zle bezañ gwerzhet e Breizh-Veur pe e Bro-Alamagn (hor c'hlianted pouezusañ e 1974); 2/3 eus vioù ar 'Benelux' a zo breizhat, - dister avat o niver e Suiz.

E 1975 e vo bet kavet arvalion nevez en Afrika-an-hanternoz hogen Alamagn Kevreadel ha Breizh-Veur a chomo ar glianted pennañ.

DREGEMENTAD BREIZH EN EZPORZHIADURIOU YERENNOU KEVAN (e tonennadoù)

Hollad	Bro-C'hall	Breizh	Dregantad Breizh
	57 097	43 950	77%
anezhañ :			
Pennoù-yeur			
ha yer	52 462	41 642	79%
Houidi	390	3	1%
Yer-indez	3 499	2 052	59%
Yer-briket	733	99	14%

ADDISPLEG

Laouen e vefemp ma c'hellfe ul lenner kas deomp ar sifroù evit rannvro an Naoned.

Evel m'emañ avat e tiskouez ar rivoù meneget ganeomp e vezo ar yerijinerezh e Breizh hep dale e dalc'h un nebeut mistri-kevala, o c'hortoz bezañ stadelet un deiz gant ar galloud

gant ur galloud politikel emanvet sokialour. Evel m'eo aes gwelout, kalz buanoc'h ez a en-dro tolpadur an ijinerezh-se e Breizh.

Da verkañ ez eus ez a da get an embregerezhioù bihan e Breizh dre ma n'eus ket ur marc'had ec'hon a-walc'h e Breizh war an dachenn ; re vras eo lodenn an ezporzhierzh evel ma c'hoarvez er broioù trevadennet hag isdioreet.

Da notañ ez eo aet da get koulz lavaret ar goueriadelezh henvoazel e Breizh koulz hag al liesgounezerezh, pezh a zo dañjerus evit ur vro a rank gortoz diouzh broioù all ar pep brasañ eus he bevañs. Da adveizañ penn-da-benn ez eo enta reizhiad armerzhel Breizh, dreist-holl avat war dachenn ar gounezerezh.

S.L.

Un nebeut gerioù.

Penner=poulet. Yeren=volaille. yer-indez=dindons. Yer-brikez=pintades. Tolpadur, tolperzh=concentration. Pakerezh=conditionnement. Diskarerezh=abattage & abattoir. Kenderc'had h.a.=production. Gorerezh=couvoir. Barregezh=capacité. Bouedijinerezh=industrie alimentaire. Pennoù-saout=bovins. Liesgounezerezh=polyculture. Gounezerezh=agriculture.

GERIOU HA NA GAVER ER GERIADURIOU

BRIENT/privilège. KOULZELOURIEZH/opportunisme.
ADREIZH/réforme. MEUREMBREGEREZH/entreprise géante.
MOZIOU-KENDERC'HAN/modes de production. STEUNV/plan.
SPESADEK/spécifique. AZONET/caractérisé. KRAVEZEL/
religieux. ARALLEKADURIOU/aliénations. HILASTALIN/
contrôle des naissances. SIOC'HANEREZH/avortement/
TREHONTELEZH/ transcendance. YONEZ/justice. ENSEZAN/
instituer. REZID/frankiz speredel. ARMERZH/économie/
ARMERZHELOURIEZH/économisme. ARMEREZH/ armement/
AVEEREZH/équipement. EMOUEZ/conscient. ATORIN/récu-
pérer. ENFRAMMAN/intégrer. TID/arbitraire, fantaisie.
GRONSRENAD/dictature. DARBOELLAN/persuader. LIESELOUR-
iezh/pluralisme. BEDELOURIEZH, GWEREDELOURIEZH/positi-
visme, empirisme. BREDONIEZH/psychologie. BREDELFENN-
EREZH: psychanalyse. KENGOR/comité. ARBENNIGOUR/spéc-
ialiste. CLADDALC'HAL/féodal. POLITIKELOURIEZH/'poli-
ticisme.' DIREN/réduire. PENNAENN/principe. KANTTREIN:
convertir. (GOURZTREIN/subvertir. BRIZH-KEVRINADEGEZH/
faux-mysticisme.

~~~~~

Liesskrivet gant ar gelaouenn Ar rener:Y.Ollivier

CPPP : 50 015

~~~~~

